

Ar vravañ femelenn

Ar vravañ feumelenn yeuank oa e kanton Kelven, oa e kanton Kelven,
A lak ar boteù-ler bemdeiz an dantel war e fenn, allon gi ho ge ge

Ieù lak ar botoù-ler bemdeiz an dantel war he fenn
Ar choej ag ar velinerion 'zo bet doc'h he goulenn

Ar choej ag ar velinerion 'zo bet doc'h he goulenn
Nemet hani bet anezhe en do ket hi alkent

Nemet hani 'bet anezhe met Jojob Kervazen
Hag eñ a ya bep sul vintin d'he ambroug d'an oferenn

Hag eñ a ya bep sul vitin d'he ambroug d'an oferenn
Hag ur bazenn doa da grapiñ ieù a gignas he glin

Hag ur bazenn doa da grapin ieù a gignas he glin
Ur jardrinour oe n'e jardrin he c'hlevas e oueliñ

Ur jardrinour oe n'e jardrin he c'hlevas e oueliñ
Get an druez en doe doc'hti eñ yas d'he c'honsoliñ

Get an druez en doe doc'hti eñ yas d'he c'honsoliñ
Bet an eizh pe nav miz war-lerch ganet dezhi ur mab

Bet an eizh pe nav miz war-lerch ganet dezhi ur mab
Ur bleuvigou melen dezhañ ha glas a zaoulagad

Ur bleuvigou melen dezhañ ha glas a zaoulagad
Heñvel mat doc'h a jardrinour hag el ma oe e dad